



BUE MARI

War ton : *Oh ! me a gar ma Breiz-Izel.*

Zantes Mari, merc'h d'an Eternel,
 Guir Vamm d'hon redemptor Jesus,
 Templ ha pried d'ar Speret-Santel,
 Ha dreist d'an oll zent galloudus,
 Advocades d'an oll beherrien,
 En hon henver madeleus,
 Groët dimp, en qualite ghristenien,
 Bean ganec'h (*ter*) en envo evurus.

Zant Bernard, en he beden charmant,
 Mari, a douche ho calon,
 Hac a obtenne, en peb istant,
 Ho c'raç, ho penediction ;
 Dre squeul Jacob bemde a pigne
 En ho pête he orêzon ;
 A dreizi dean houi disquenne
 Graço immens (*ter*), Mari, divoar ho tron.

An n'em adres a ran gant fianç,
 Vêl zant Bernard, d'ac'h-u, Goerhes,
 Evit goulen deus ho assistans,
 Deus ho cras hac ho madeles ;
 Ni a zo eur lest ho voyagi
 Voar ar mor a fallagries,
 Ha ma ne deut houi d'om freservi
 A zo dangeur (*ter*) deus ma zilvidigues.

Ho quenet a deu d'em ravissan
 Ha houi ho vean hoas buguel ;
 Bars an ho portret pa goutemplan,
 Ma speret a bing goël-huel :
 Monet a ra betec an nevo
 En toues an oll zerafinet,
 Hac ho remerquin a ra eno
 Gant cals a joa (*ter*) gante oll antouret.

Zantes Anna, pried zant Joachim,
 Zantes leun deus a verito,
 Preservet ho heuz deus an abim
 Tud hac a ra ho teliço ;
 Ho henel Mari, ho merh divin,
 Ho heus groët hon evurustet ;
 Eva a nefoa groët hon rouin :
 Mari ho merh (*ter*) a neus hon recouret.

Redemptoures ar bed en antier,
 Da biou goelloh n'em adressin
 Ar beden ver-man a han d'hober,
 A ran evouit ho invoqui :
 Na lezet jammes en anbandon
 Nep a neus confianç en-noh ;
 Pa nomp dindan ho protection,
 Pelieh biquen (*ter*) ouffemp bean goëlloh.

Zellet Mari en templ presantet
 Gant cals deus a devotion :
 Ar plah bian-man nevoe hanet
 A anonç hon redemption ;
 Hi eo a gle guenel an Doue,
 Salver an oll en general ;
 Respectomp eta he halite,
 Rac savet eo (*ter*) dreist an oll verhet all.

Deja lagad an Tad eternel
A den da vrilla voar Mari :
Honnes, e-mean, eo ma buguel,
M'oll esperanç a zo en n'hi.
Prestic a teputti Gabriel
Evuët monet d'he saludin :
Drezi ma Map a desir guenel
Red a vo din (*ter*) donnet den exauçin :

Zellet-hi, breman, ho studian
Hac ho tisquin he hentelle ;
Bemde a-man er scol gant Anna,
Ar vam leun deus a vertuyo,
Ar Speret-Santel en he halon
A ra d'ei tanva ar graço
Deus a bere pales ar Sion
A zo an gloar (*ter*), an joa, an triompho.

Vuit gardien d'he virjinite
Doue a ro dei ar pried :
An namunuzer paour, ar halve ;
Mës an den a hraço carguet ;
He hano a zo Joseph David,
Deus a raç ar bafriarchet
An den a hraç an den a verit,
Gardien eo (*ter*) d'hon Zalver biniguet.

Pa voa arri ar momet fatal
D'an eil ferson deus an Drindet
Da donnet d'expiant ar scandal
A nefoa Lucifer roët,
A voa roet urs da Habriel
Da disquen bars en Nazareth
D'anonç dei a beurs an Eternel
A voa vuit mam (*ter*) d'he Vap uniq choaset.

Min ho salud aman, Mari,
Rac houï a zo leun deus a hraç ;
Ennoh a n'em incarn ar Messi
Presentamant, he voar ar plaç.
Na deut pelloh eta da sponta,
Rac gant Doue, on deputed
Da dont, Mari, d'ho havertissant
Deus ar helo (*ter*) a meus d'ac'h anoncet.

O ! min a zo ar grouadures
Indign deus an sort faveurio ;
Nëo quet bras avoalh ma santeles
Evnit diguemer an Autro :
Mes da vezo groët he volonte
Evel ma neus bet desirët,
Disposet a hon da guement-se,
Petra benag (*ter*) ze na veritan quet.

Bonjour a joa, ma-hinitervez,
E me Vari d'Elisabeth ;
Na n'on pelloh en tristediguez
Ho tonet herrie d'ho coëlet.
Biscoas histoar d'ach min na gontis
Quen coant, quen caer hac an hinin
Pec'hinin quement em rejouïs
Hac a rent joa (*ter*) ha contantamant d'in.

Petra a zo guenit a nevoe,
Ma hinitervez quer Mari ?
Possub ëo aspe pedet Doue
Evel ma neus groët Zachari ?
Mar an neus an ell da saludet
Prestic te deui da vezan mam ;
Parri raffen he teus concevet
Liberateur (*ter*) bugaligo Adam.

Evel pa vel-hu ar brofetes,
Elizabeth, ho heus comzet ;
Mes bepret min a chommo goerhes.
Hervez ma zo din prometet.
Penevert da ze biquen james
Ho min na mije consantet
Donet da rein ar hineveles
D'ar prinç royal (*ter*) Emmanuel hanvet.

O ! peguen caër a hêo da gomzo,
Ma hinitervez admirabl ;
Facil eo a posedes graço,
Ze n'a nêo pelloh incredabl.
Rejouissan a ra ma halon,
A ma speret a ra ive,
Pa voëlan out en pöcession
Deus an tensor (*ter*) precius d'hon ligne.

Marqueret brema ni a gano,
Elizabeth, a galon vad
Assambles, an neubeudic rimo
Da formi ar *Magnificat* ;
Ze a rento hoas gloar da Doue
Cöuls a ma ra hon oil cuvro ;
Transfigurï rei he vajeste
Gant ar charm bras (*ter*) ho clevet hon moejo.

Commanç ta gant ar houplet quantan,
Ha bars an eil min teus suivo,
Dit eo gleet commanç da ganan
Pa neo te ffileuren a nevo ;
Guenit a man ar herran tresor
A zo breman var an douar,
Pa nêo guir a teus te an n'enor
Da vezan mam (*ter*) da vrazoh vuit Cesar

Huel-caër ez eo ma halite,
Elizabeth, en gout a ran :
Ma fleuren gaër a virjinite
Eo em m'huella er bed-man ;
En peb amzer a hon bet cuzet
Da daoulagât ar bet pompus ;
Mes breman min a vezo brudet
Dre gantico (*ter*) meurbet harmonius.
Biniguet out dreist an oll vrague,
Ma hiniterves venerabl ;
Zantout a ran tre ma daou goste
Ar rejouissanç deus ma mab,
Possedi a res ar guir Douc
Aboe queit amzer gortoët ;
Accompliset eo ar bromesse
Deus ar Scritur (*ter*) groët gant ar brofetet.
Tav breman, vuit mad, gant quemense
Ha chom voar se bepret secret ;
Discleriet oll a vezo goude
A pez a vezo hoarveet
Rentomp meulodio d'on C'hrouer
Da vean bet gantan pliget
Sevel en gloar ar plabic dister,
Quen-a-vo ta (*ter*) breman, Elisabeth.
Partia a ra Mari Joachim
Accompagnet deus an ele,
A dreus ar montagno a quer prim,
Ha den nemerthi na voar se.
Birviquen he gouq hi na dauro,
Rac a bep-tu eo divoallet,
Gant ar milion a sperejo
Pere a zo (*ter*) vuit he divoal carguet.

Guenel a ra ar Verb eternel
Bars en ar c'hraou en Betelem ;
Goude a soufr ar maro cruel
Dam dost dar guer Jerusalem.
Prenan a ra an oll beherrien
Voar leign mene trist Golgota ;
Eh man gant Mari voar he barlen.
Evidom oll (*ter*) ressusistan a ra.

Mari a deu ive da glevel
Ha da finissa he deyo ;
He maro a zo caër ha zantel,
Resusistan a ra d'he zro,
Pignal a ra entoës an elez,
Dre vertu he Mab, d'an evo ;
Ha ni, mar fel dîm pignal ive,
Emitomp oll (*ter*) benide he vertuyo.

Vertuyo Mari eo ar herran
Deus an oll vertuyo gristen :
Nep ho imito voar ar bed-man
Na vezo collet birviquen.
Bezom eta oll trugareus
An eil en andret eguile,
Humbl' chast a misericordius,
Ma helfomp oll (*ter*) imitan he bue.

Zellet-hi en nevo curunet
En recompans d'he oll foannio ;
Gant an Drindet sacr eo destinet
Da vean rouanes eno.
Mar fel dimp antren er barados,
Bezomp recours dezi bepret ;
Eh man pell a zo ous on gortos
Ma vefomp oll (*ter*) en n'he gloar curunet.

Terminomp breman oll assambles
Ar vue-man quen angeliq
Pini a neus rene ar Voerhes,
Ha lequeomp oll en pratiq
Ar vertuyo ze quen exelant
Pere hon rent hanval outbi,
Eruit ma helfomp en peb istant
Oll bean pres (*ter*) da vonet da viti.

An nep a varv gant gouir gonfianç
Ebars er Vam-ma quen santel,
A zo certen bars en assurance
Dimeus ar bonheur eternal.
Netehom eta hon halono
Mar guign souillet, min ho suplui,
Ma helfomp oll monet d'an evo
Da renta gloar (*ter*) hac homaj da Vari

Ar Minous ar hompositer
Deus a hantiquo brezonnect,
A neus bet laqueet he amzer
Da studian a da brezec
Ar vue exelant a Vari
Pehini aman a voelet,
Eruit ma refomp oll melodi
Dei en pep heur (*ter*) couls vel en peb monet.

(Propriété de l'Auteur.)